


12



BUEZ AN AUTROU
SANT MELAR

PATRON EUS A ILIS LANNEUR



Troet a c'hallec en brezonec, er bloa 1732.

Var ton) *Guèrz an Autrou Sant Yan ar Bis.*

*Pretiosa in conspectu Domini mors Sanctorum
 ejus. Psalm. 115.*

C'HOANT bras a meus, gant graç Doue,
 Da scriva ur C'hantic neve,
 Ha disclêria, evit e c'hloar,
 Buez an Autrou **SANT MELAR.**

Eus a Sant Melar pa gomzàn,
 Ententit petra' lavaràn,
 En Ilis vras a guær Lanneur,
 E Chapel zo dindan ar c'heur.

— 2 —

C'houi, Lanneuris, a zo eürus
Caout un tenzor qer precius
Evel oc'h eus a beurz Doue,
Ouz o miret bep nôs ha dê.

Mab voa d'an Autrou Sant Milliau,
Prinç ha Roue eus a Guerneau,
A lignes bras e voa Melar,
Pa voa demeus a goad royal.

Hervez ma cavàn raportet
Ebars en e vuez gallec,
E dad hac e vam a veve
Ho daou en güir doujanç Doue.

N'o devoa bet var an douar
Buguel nemet ar Prinç Melar ;
Mab unic voa a dra certain,
Hac heritour d'ar gurunen.

Qen agreabl voa o bue,
Var ar bed-màn dirac Doue,
Ma cresqe bemdez o madou,
En abondanç dre e c'hraçou.

Biscoas er spas eus a seiz bloa,
Hervez ar vuez ma lenna,
Ne eure en o douaro,
E nep fêçon ur banne glao.

Produi a rent gouscoude,
Er spas eus ar seiz bloavez-se,
A bep seurt hed en abondanç,
Peguer bras eo ar Brovidanç !

— 3 —

Piou ta ne lavaro goude
 Voa ur miracl a rê Doue,
 Dre ar glisen demeus an eê,
 O douarou a arouse.

Doue en deus a bep amzer,
 Roet graçou particulier
 Da nep er c'har parfetamant,
 Güelet a reomp sclêramant.

Milliau, Tad da hor Prinç Melar
 En devoa ur breur qen digar,
 E hano a zo Rivodus,
 Eun eil Cain maleürus.

Qement a loan a rê gantàn
 Clêvet na güelet anezàn,
 Ne glasqe ar fêçon bemde
 Nemet da gavet e vue.

Cont Rivodus, te zo traitour,
 N'en dout sur nemet eul layour,
 Biscoas n'en deus da vreur Milliau
 Grêt ouzit e nep fêçon gaou.

Da vreur a voa caret gant Doue,
 Abel güechal a voa ive,
 Cain he laz gant drouc onta,
 Te ra ives ar memes tra.

Ar Prinç Melar zo yaouanqic,
 N'en deo nemet ur buguelic,
 Incapabl eo eus a bep tra,
 Pa n'en deo qen nemet seiz bla.

— 4 —

Se a ra dit, qy arrajet,
Bezàn oute qer malicet,
O' clasq usurpi o moyen,
Ha possedi o c'hurunen.

Espia a ra an amzer
Propr evit ober e affer;
Ur c'hrim eo zo abominabl,
N'en deo nemet ur miserabl.

Ar Prinç Milliau ne ouie qet
Trahison e vreur milliguet;
Ne sònje qet en devoa c'hoant
D'e laza qer soubitamant.

Qemennet en deus e Brinçet,
Ar Roue Milliau d'e gavet,
Rivodus en eur gueb ive
Er memes assamble gante.

Mervel a ra va goaziet,
Trelati a ra va speret,
Pa deuan da gonsideri
Ar c'hrim a ya da gometti.

E laza a ra an tyrant,
Var ar plaç sur soubitamant,
Hep truez na compassion :
Hemâ eo an den dirêson!

Melar, cetu c'houi miserabl;
Allas! cetu lazet ho tad,
Brêmâ souden soubitamant,
Gant Rivodus e vreur mechant.

— 5 —

Ne ouzoc'h qet ar gonseqanç,
 Re yaouanc oc'h en assuranç;
 Allas! nemet gouëla ne rit;
 N'ouzoc'h petra a livirit.

Homàn ar Brinces Haurilla,
 Zo fatiqet, mervel a ra
 O velet eur seurt trahison.
 Erruet hep occasion.

Ne ell na gouëla, na parlant,
 O velet eur seurt accidant,
 E c'halon a rann gant glac'har,
 Pa sònch en he mabic Melar.

Clêvet a ràn moez ar Brincet
 Oll a eur voez o lavaret
 Adieu d'ho Mestr ha d'ho Roue;
 O pebes maleur, va Doue!

Un darn a güelc'h gant o daëlou
 E gorf sacr hac e c'houliou;
 Darn all a sao ar Prinç Melar
 Hac e vam divar an douar.

Gouëla a dleffec'h, Lanneuris,
 Pa antreit en oc'h Ilis,
 Oc'h ober meditation
 Var buez Melar, ho Patron.

Adieu d'oc'h oll contantamant
 Ebars er bed-màn, Prinç yaouanc,
 Mestr eo oc'h eont d'ho curunen,
 Disposateur var ho moyen.

— 6 —

Sònjit erfat petra a reët,
Orphelin oc'h brêmâ rentet;
Ho mam ha c'houi zo truezus,
O puez a zo pitoyus.

Goude e grim abominabl,
E za c'hoas, an den detestabl,
Da gonspira en e galon
Demeus e ni an trahison.

Allas! aon a meus, Prinç Melar;
Ne glasq oc'h eont, an den digar,
O laza ha caout ho puez,
Couls hac hjini ho tad ivez.

Rei a eure commandamant
Digas dezàn ar Prinç yaouanc,
Pa na allas qet e lazàn
Oc'h ordren trouc'ha dioutàn.

E droad cleiz hac e zorn deo,
O va Doue, Crouer an eo!
Pa na allas e boignardi
Mancout a ra disesperi.

Laqet oc'h da veza miserabl,
Rentet oc'h brêmàn incapabl,
Mes un Doue zo truezus,
Mad ha misericordius.

Siouas qasi ar memes tra
A rêr d'ar minoret brêmâ;
Ma na droc'her qet o memprou
Usurpi a rêr o madou.

— 7 —

En eur gonsolit, Prinç yaouane,
 Doue zo bras ha puissant,
 Biscoas james n'en deo manqet
 Da nep er gar gant lealdet.

Un Æl a zisqen eus an eê,
 Gantàn un dorn a beurs Doue,
 Hac un troad guerc'h grêt admirabl;
 O Doue, emàn eo ar miracl!

Brêmâ ta oc'h eus, Prinç Melar,
 Daouarn ha treid var an douar?
 Evit beza materiel,
 Couls int hac ho re naturel.

Doue c'hoas memes a bermet,
 Dre ur miracl en e andret,
 Ma cresqe ar re materiel
 Evel e vemprou naturel.

Qen douç voa, qer carantezus
 Quz ar beorien qer vertuzus,
 Ma ravisse gant güirione,
 Certen qement den er güele.

Qer pur ha qer chast e veve
 Evel un Æl demeus an eê,
 Ma c'harraje e eont ingrat,
 O clêvet comz eus e vuez mad.

Aoun en devoa, ar miserabl,
 Ar muntrer cris ha detestabl,
 N'en eur vanche a varo e dad
 Ar Prinç pa vije deut en oat.

— 8 —

Petra eo dide, Rivodus,
 Crena, ô traitour maleürus!
 N'en deus güir gant an den Doue
 D'en em venji deus da grim-de.

Lêzel a ra da bunissa
 Nep en eur venjo a bep tra :
 Un Doue eo n'en em drompl get;
 Ennez a eneo da bec'het.

Lazet ec'h eus da vreur, e dad,
 Troc'het ec'h eus memproü e vab,
 Jouissa' res oc'h e gurunen,
 Hac usurpet e oll voyen.

Petra fell dide davantach?
 N'en deo get contant da arrach?
 C'hoas e renqi, m'er goar erfat,
 Trempa da zaouarn en e voad.

Diguemen a ra, ar muntre,
 Keryoltanus, ar maguer,
 Goulen a ra, interroji,
 Ar Prinç Melar pelêc'h emedi.

Pa velas erru aneza,
 Er pedas da zont da leina
 Davetàn un dê d'e bales,
 Ma comzent o daou assambles.

Taol evez, Keryoltanus,
 N'en em rentes ur maleürus;
 Taol evez petra liviri,
 Pa vezi gantàn o tébri.

— 9 —

Me glêo dija an discoursou
A dremen entrezoc'h o taou ;
Ne glasq nemet d'a anjoli,
Evit laza dezàn e ni.

Madou ober en assuranc,
A bromet dit en abondanc,
Mar qeres trahissa e ni,
Birviqen did ne vanco mui.

Aour hac arc'hant ha douaro,
Qement a güiri tro var dro
A pezo, c'hoas sur, va mignon,
Mar gres erfat da drahison.

Mont a ra Keryoltanus
D'ar guær triomphant ha joaüs,
Ha pa arru ebars er guær,
E coms d'e bried an affer.

Dioüallit ive, magueres,
Ne vec'h ar brassa traitoures ;
Penos n'o po truez ebet
Eus ar buguel oc'h eus maguet?

Oblijet oc'h da zisclêria
Petra fell da ober dezâ ;
Rac p'en devez denet ho lèz,
Recourit dezàn e vuez.

Qer contant eo hac he friet,
Pa gleo hano e vo peêt :
Pa glêver hano a arc'hant,
Peb tra a rêr assuramant.

— 10 —

Mar e pes arc'hant ha mado,
Gra din qement a lavaro :
Nep a zo paour a zo cazet,
Nep zo pinvidic zo respetet.

Mar boa qer cre en he lezen,
Mui eo brêmâ a dra certen ;
Pa zeo contant ivez ar vreg,
N'en deus mui güir da lavaret.

Conta a ra c'hoas d'ar Barner
Penos emedi an affer ;
Rac c'hoas eo un neubeut doutus.
An den fall Keryoltanus.

Allas ! cetu-én goal gusuliet,
Gant ar Barner hac e briet ;
An traïtour fall ha divergont,
Monet a ra da gaout ar C'hont.

Dija eus seiz sizun antier,
Aboe ma ze êt deus ar guær,
Da gonspira pe var fêçon
Gallout ober e drahison.

Doue a douch calon ar vreg,
Ne ell na repos, na cousqet
Pa sònch ebars en e bûguel,
Pe var fêçon e renq mervel.

Guervel a ra ar Prinç Melar,
Conta ra dezàn he glac'har.
Rac-se dioüallit, Prinç yaouanc,
Me ell lavar d'êc'h franchamant.

— 11 —

Var guement-mâ e partiont
Demeus ar guær, hac e teuont
Ebars en avantur Doue,
Qercouls an eil hac eguile.

En quær Lanneur ec'h erruont
D'ar c'hastel monet a reont,
Elec'h ma voa d'an amzer-ze
Commer, Letanant ar Roue.

Ar C'hont Commer pa o güelas,
Gant cals a joa o recevas,
Dre ma voa car d'ar Prinç Melar
Ha ma voant oll a goad royal.

Ar C'hont Commer hac e Briet,
D'ar Prinç o deveus lavaret,
Chomit ganemp amâ, Otrou,
Deoc'h eo hon ty hac hor madou.

Grêt amâ demp ho temeuranç,
Ni gret e viot en assuranç,
Ne sônch qet demp eve hini
A grette dont d'oc'h attaqi.

Gant henor ha civilite,
Trugarecât a ra aneze,
Gant modesti ha temperanç
E vev ebars en ho fresanç.

E vuez a voa qen admirabl,
E viraclou qen remerqabl,
Ma clévas buan Rivodus
Pelec'h e zoa an den eürus.

— 12 —

Evel ma cleo pelec'h e voa,
 Keryoltanus, emezâ,
 Ar vech-màn e renques ober
 Heb tardi pelloc'h an affer.

Er moment-se, hep tardi mui,
 Keryoltanus a barti
 E vab hac én da guær Lanneur,
 Elec'h ma voe grêt ar maleur.

En quær Lanneur pa aruont,
 Saludi ar Sant a reont,
 Hac ar valiç en ho c'halon;
 O va Doue, pezh trahison!

Ar Prinç a ra stat aneze,
 Gant ar joa en devoa oute,
 Laqat rêi deze da zibri,
 Hac o loja er memes ty.

Pa voa aru anfin an nôs,
 Ha poent d'an oll mont da repos,
 En er pedont da vont gante
 En ur memes cambr evelte.

Cetu eno an trahison
 En devoa c'hoant an daou fripon
 Da gometti en e andret,
 E lazàn pa vije cousqet.

E vagueres a lavaras
 D'ar Prinç Melar, pa o güelas:
 Dioüallit oute, Prinç yaouanc,
 Aon a meus n'en dint daou dyrant.

— 13 —

Teulet evez mad, mar qeret,
Mar det davite da gousqet;
Deut int certain d'o trahissa,
Ne glasqont nemet ho laza.

Adieu, va buguel, emezi,
Ar vech-màn vo an disparti,
Me vel ervat hep tardi pell,
E renqet en martyr mervel.

C'houi pehini bete vrêmàn
Zo bet ur Sant var ar bed-màn,
O pet sònch en ho magueres,
Pa viot ebars er Barados.

Pa voa èt an oll da repos,
Ha serret an dorèjou clos,
E tibennas, an daou dyrant,
Pa voa cousqet ar Prinç yaouane.

Pa o devoa grèt an torfet,
Ober an tec'h o deus sònjet,
Da gass ar penn da Rivodus,
An daou massacrer maleürus.

Dre ma voa teval an amzer
Hac alc'hoezet clos ar perzier,
Instanus o vont en he rout,
E tal an ty a dor e c'houc.

Cass a ra Keryoltanus
Penn Sant Melar da Rivodus,
Da gontanti e grueldet,
En esper bout recompançet.

— 14 —

Neuze soudan e permetas
 Doue ma varvas var ar plaç.
 Cetu pe seurt punition
 En pêamant d'e drabison.

Da ben tri de goude ma voa
 Rentet ar penn d'an tyrant-mâ ;
 Surprenet voe gant ar maro ,
 Cetu e recompanç eno !

O pet sònch eta , Lanneuris ,
 Pa antreêt en oc'h Ilis ,
 Deus a varo ar Prinç Melar ,
 Hac e vuez var an douar.

E gorf sacr en deus reposet ,
 Pell bras en douar biniguet ,
 En oc'h Ilis , dindan ar c'heur ,
 Parossionis a Lanneur.

Eun archet men a zo enni ,
 Elêc'h ma e bet o reposit
 E gorf sacr goude e varo ;
 Pebes tensor demeus an eô !

En Quemper-Caourantin emàn
 E benn biniguet a vrêmàn ;
 Patron eo dêc'h en ho paros
 Hoc'h avocat er Barados.

Gouel Sant Melar hac e Offiç
 A vez certen bep bloas requis ,
 An deiz qenta a vis Here ,
 En e enor ha gloar Doue.

— 15 —

Da gôves ha communian ,
An deiz-se oll en o pedan ,
Evit alumni en ho calon
D'hor Patron an devotion.

Auteur ar verz-mâ a suppli
Qement den a glêvo anêzi ,
Da laret a galon barfet
Peb a *Bater* en e reget.

M'or bo oll goude hor maro
Digant Doue Crouer an èo ,
Lod assambles gant **SANT MELAN** ,
Deus ar joaüsted hac ar gloar.

AMEN.



E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.

